

YANN O KOUSKET HA YANN O LENN


Christian Jolibois ha Christian Heinrich

Embannet gant Ti Embann ar Skolioù

Troidigezh Goulc'han Kervella

Diell skol da aesaat al lenn da skolidi al live 3

Yann Varc'h Thorel



LANKAD 1

*

I. A-raok kregiñ

- A. Sellomp ouzh ar golo ha deskrivomp eñ (dre gomz da gentañ).
- B. Petra eo talbenn al levr ?
- C. Gant piv eo bet skrivet ? treset ?
- D. Deomp da lenn ar bajenn 2 da wiriañ.
- E. Gant peseurt ti eo bet embannet (aozet, kempennet, fardet) al levr ?
- F. Deomp da lenn pebare pajenn ar golo da glokaat ar c'hraf A.

II. Goulennoù diwar-benn ar golo

- A. Piv a weler war ar golo ?

- B. Perak ne c'hallo mui ar razh lenn istorioù d'ar yerigoù ?
(Iaka ur groaz er c'hombod mat pe .

Peogwir e vo debret gant an arzh.

Peogwir eo erru re gozh.

III. Geriaoueg

biken : morse en amzer dazont.

koñchenn : kontadenn.

koñchenner : unan a gont istorioù.

Ar pezh zo : ar gudenn eo.

kantad : ur strollad kant (100).

'mit-hu ? : emezit-c'hwi ? ; a lavarit-c'hwi ? ; d'ho soñj ?

YANN O KOUSKET HA YANN O LENN

Christian Jolibois ha Christian Heinrich

IV. Studi ar yezh : Al liester gant al lostger *-ig*.

Skouer :

	unan	lies
bras	yar	yer
bihan	yar IG	yer IG où

Klaskomp en ur ser :

	unan	lies
bras	levr	
bihan		

Klaskit daou-ha-daou :

	unan	lies
bras	plac'h	
bihan		

	unan	lies
bras	paotr	
bihan		

V. Skrivañ :

Mar skrivfes pe dresfes ul levr, piv a garfes trugarekaat ? Petra a skrivfes dezhi pe dezhañ ?

(Sell ouzh ar bajenn 3)

YANN O KOUSKET HA YANN O LENN

Christian Jolibois ha Christian Heinrich

LANKAD 2

(pajennoù 4-9)

*

I. GERIAOUEG :

birvilh : buhez, entan, fichfich.

toumpi : talabao, cholori, trouz bras.

klud : lec'h ma vez serret ar yer diouzh an noz ha ma tozvont vioù.

a-unvouezh : an holl vouezhioù asambles evel pa na vefe nemet unan.

a-vec'h ma : diouzhtu.

skarzhañ e c'houzoug : sklaeraat e vouezh oc'h ober « c'heum ».

un dudi : ur blijadur.

selloù o parañ war : o sellout ouzh...

II. GERIAOUEG : al liester :

« Ac'hanta, labousedigoù ! »

	unan	lies
bras	labous	laboused
bihan	labousig	labousedigoù


Klask ober ar memes tra gant al loen a blij dit ar muiañ :

	unan	lies
bras		
bihan		

YANN O KOUSKET HA YANN O LENN

Christian Jolibois ha Christian Heinrich

III. GERIAOUEG : ar c'horf



..... morzhed.

..... glin.

..... kof-gar.

..... troad.

IV. LENN :

A. Distag ar gerioù-hud :

« Urwecheoa,urwechneoaket,hadresarwech-seeoakoulskoude. »

.....
.....

B. Klask war ar bajenn 7 ur ger kenster gant « koñchenner ».

.....

V. LIVAJ :

« Karmelito ar c'hilhogig ruz-wenn ». Peseurt liv eo evidout “ruz-wenn” ?

Ha meizet 'c'h eus perak ?

Peseurt liv eo ruz-velen ?

Peseurt liv eo glas-ruz ?

Peseurt liv vo melen-glas ?

YANN O KOUSKET HA YANN O LENN

Christian Jolibois ha Christian Heinrich

VI. GOULENNOÙ KOMPREN :

A. Sell ouzh an teir skeudenn war ar pajennoù 8 ha 9 ha respont :

Petra eo ar goñchenn euzhusañ ?

Troioù-kaer Alanig al louarn

Hini Ulises

Hini ar yar he vioù aour

Petra eo ar goñchenn fentusañ ?

Troioù-kaer Alanig al louarn

Hini Ulises

Hini ar yar he vioù aour

Petra eo ar goñchenn dristañ ?

Troioù-kaer Alanig al louarn

Hini Ulises

Hini ar yar he vioù aour

B. Perak e lavar ar Razh koñchenner « labousedigoù » d'ar yerigoù ?

.....
.....

C. Pezh koñchenn a blij ar muiañ d'ar yerigoù ?

.....

D. Pet gwech o deus hi klevet ?

120 gwech

2 100 gwech

Kant gwech war un u gwenn

E. Klask ul loen nand eus mann ebet d'ober e klud ar yer. Petra eo ?

.....

YANN O KOUSKET HA YANN O LENN

Christian Jolibois ha Christian Heinrich

VII. Yezhadur : ar verb *bezañ*

« Spontus eo ! »

VI. A. Argenomp ar verb pa droomp ar frazenn war an tu gin evel ur vaneg.

Me ZO fur ha reizh.	Fur ha reizh (-me).
Te ZO fur ha reizh.	Fur ha reizh (-te).
Karmelito ZO fur ha reizh. Karmen ZO fur ha reizh.	Fur ha reizh (-eñ). Fur ha reizh (-hi).
Ni ZO fur ha reizh.	Fur ha reizh (-ni).
C’hwi ZO fur ha reizh.	Fur ha reizh (-c’hwi).
Karmen hag he mignonezed ZO fur ha reizh.	Fur ha reizh (-i).

Petra hon eus graet ? Petra zo e deroù ar frazenn ?

.....

.....

VI. B. Pleustriñ : klask furm reizh ar verb *bezañ* er frazennoù amañ da heul :

- A. Fromet-bras ar Razh Koñchenner kozh.
- B. Na pegen kozh (-me) aet !
- C. N’ (-ni) ket domino gant hemañ !
- D. Na piv-c’hwi ?
- E. Difoupet (-i) en ur gambr...
- F. Pe anv -te ?

YANN O KOUSKET HA YANN O LENN

Christian Jolibois ha Christian Heinrich

LANKAD 3

(pajennoù 10-15)

*

I. GERIAOUEG :

salv e ... ! : Gant ma ... !, Spi 'm eus e ... !

en desped da : daoust da.

mont d'e glud : mont d'e wele, mont da gousket.

kilhoroù (sonn war e gilhoroù) : divesker, divc'har (reut war e zivesker, war e zivc'har).

lostok : lostek, en deus mezh, e lost etre e zivesker.

war e bouezig : goustad, gorrek.

klemmichat : klemm.

glac'har : tristidigezh.

kamambre : bugel a vez graet re war e dro, na soñj nemet ennañ e-unan, na ra ken pezh a gar.

treizher-marvailhoù : unan en deus desket marvailhoù gant ar re gozh hag o c'hont d'ar re yaouank.

emeve : emezon(-me), a lavaran-me.

goueled : traoñ, foñs.

II. GERIAOUEG : liester ar micherioù (a echu gant *-er*).

« Deuet ar poent din da vont davet va hendadoù e paradoz ar goñchennerien ! »

unan	lies
koñchenner	
labourer	
soner	

Hag ar vicher a blijfe dit ober ar muiañ :

unan	lies

YANN O KOUSKET HA YANN O LENN

Christian Jolibois ha Christian Heinrich

III. GERIAOUEG : daouadoù ar c'horf

1.1. Dizolomp

« Staget e oa ma divrec'h ha ma divhar ouzh an douar gant tachoù. »

« Un nebeud munutennoù war-lerc'h e pignas un dra bennak gant ma
gar. »

« Tu a voe din da fiñval ma brec'h kleiz. »

« Ur wareg hag ur bir a oa gantañ en e zaouarn. »

« Flemmet e voe ma dorn kleiz ha ma dremm ganto. »

Jonathan Swift, *Beajoù Gulliver*

1.2. Dalc'homp soñj

An *daouder* a arouezer gantañ strolladoù daou.

Alies e vezont arveret evit lodennoù ar c'horf :

benel

brec'h ▷▷ divrec'h

gar ▷▷ divhar

gourel

dorn ▷▷ daouarn

glin ▷▷ daoulin

Diwall : stummet e vezont gant ar rakgerioù

▷▷ « div- » evit an anvioù benel. ▷▷ « daou- » evit an anvioù gourel.

1.3. Pleustromp

a. E-touez an anvadoù-mañ, barrenn ar re n'o deus ket a zaouder. Gallout a rez klask er geriadur :

fri - lagad - genoù - brec'h - gweuz - bronn - blev - jod - revr

YANN O KOUSKET HA YANN O LENN

Christian Jolibois ha Christian Heinrich

IV. LENN :

A. Distag ar gerioù-hud :

« Setuechuvac’hontadenndibunetganinpenndabenn. »

.....

.....

B. Klask war ar bajenn 11 gerioù kenster gant « Trugarez vras ».

.....

V. GOULENNOÙ KOMPREN :

A. War betra he deus Karmen graet he zresadenn d’ar Razh (respont):

Ur follenn

Ur vleunienn

Un delienn

B. Pegoulz e teuy ar Razh Koñchenner en-dro ?

Morse

Ar sizhun a zeu

Da Nedeleg

C. Perak e teu dour e daoulagad ar Razh Koñchenner (p.11) ?

Peogwir emañ o vont da veuziñ er puñs.

Peogwir emañ o vont da leñvañ.

D. Perak eo glac’haret ar Razh Koñchenner ?

.....

.....

E. Pezh koñchenn a blij ar muiañ d’ar yerigoù ?

.....

YANN O KOUSKET HA YANN O LENN

Christian Jolibois ha Christian Heinrich

F. Perak eo glac'haret ar Razh Koñchenner ?

Kollet en deus e damm fourmaj.

N'en deus kavet den ebet da zeskiñ dezhi pe dezhañ ar marvailhoù a oar kontañ.

Re gozh eo.

G. Petra a zebr an deñved ?

Gloan.

Geot.

Fourmaj.

VI. Yezhadur : ar verb *bezañ*

VI. A. Liamm ar furmoù verbel ouzh o rener :

out	☯	me	☯
on	☯	te	☯
int	☯	eñ / hi	☯
oc'h	☯	ni	☯
eo	☯	c'hwi	☯
omp	☯	i	☯

VI. B. Argen ar verb :

- Na pegen kozh **on (-me)** aet !
- Na pegen kozh (-te) aet !
- Na pegen kozh (-hi) aet !
- Na pegen kozh (-eñ) aet !
- Na pegen kozh (-ni) aet !
- Na pegen kozh (-c'hwi) aet !
- Na pegen kozh (-i) aet !

YANN O KOUSKET HA YANN O LENN


Christian Jolibois ha Christian Heinrich

LANKAD 4

(pajennoù 16-21)

*

I. DIZOLEIÑ



Ezop, pe Aesopos,

a oa un den o vevañ e-kichen Bro C'hres war-dro 2 700 vloaz 'zo. E gwirionez ne oar den ebet mann ebet diwar e benn. Hervez ar vojenn e oa ur sklavour a blije dezhañ arguzenniñ gant e vestr, ur prederour. Goude bezañ bet dieubet gant e vestr e vefe aet da gontañ ur fablenn pe fabledennoù d'ur roue pinvidik, Kresus.

Jean de La Fontaine zo bet levezonet-bras gant Aesopos hag a rent enor dezhañ en e levr.

II. Koñchennoù a bep oad hag a bep lec'h : sell ouzh ar skeudennoù pajenn 21.

Eus peseurt oadvezh pe eus peseurt rann eus ar bed e 'z lakaont da soñjal ? Liamm i.



Egipt



Persia



Ragistor



Afrika

YANN O KOUSKET HA YANN O LENN

Christian Jolibois ha Christian Heinrich

LANKAD 4

(pajennoù 16-21)

*

I. GERIAOUEG :

eontr : breur ma zad, pe breur ma mamm.

mougañ : pa n'eur ket evit analiñ ken.

Alato ! : holala !

warlerc'hiad : unan a zeu war-lerc'h.

bir : ⇨.

yarañ : chom oc'h ober netra, ruzañ, lezirañ / diskuizhañ.

Tarzh an deiz : mare ma tarzh gouloù an heol da zeroù ar beure, gouloù kentañ an deiz.

sklokal : 1. C'hoarzhin / 2. Ober trouz ur yar.

hêrezh : pezh a vez roet gant an dud pa varvont d'o warlerc'hidi.

rumm : ur strollad tud o deus tamm pe damm ar memes oad.

a rumm da rumm : eus ar re goshañ d'ar re yaouankañ.

II. GERIAOUEG : anv unan ur perzh dezhañ a echu gant **-ad** (ur paotr) gant **-adez** (ur plac'h).

Ur paotr o tont war-lerc'h zo ur « **warlerc'hiad** ».

perzh an den	paotr	plac'h
Unan a vev e Breizh.		
Unan o tremen.		
Unan a vev e kêr.		
Unan a vev en Naoned.		
Unan zo kozh.		

YANN O KOUSKET HA YANN O LENN

Christian Jolibois ha Christian Heinrich

III. LENN :

A. Distag ar gerioù-mañ :

«Denebetna'zpeuskavetc'hoazhevitoberarvichergoñchennerwardalerc'h ?! »

.....

.....

B. Klask war ar bajenn 17 ur ger kenster gant « kavout ».

.....

IV. GOULENNOÙ KOMPREN :

A. Peseurt loen eo an tasmant a zeu er-maez eus ar puñs (respont):

Un den

Ur razh

Un antilopenn

B. Pegeit amzer a chom d'ar razh da gavout e warlerc'hiad koñchenner ?

Re ziwezhat eo.

Tri devezh.

Betek warc'hoazh.

C. Petra eo an divinadell a zle sikour da gavout ur warlerc'hiad d'ar c'hoñchenner ?

.....

.....

D. Penaos e fell da Garmelito reiñ sikour ?

.....

.....

YANN O KOUSKET HA YANN O LENN

Christian Jolibois ha Christian Heinrich

E. Perak ne c'hell ket Karmelito bezañ warlerc'hiad d'ar razh koñchenner ?

F. Perak e fell da Garmen sikour ar razh koñchenner ?

Anavezout a ra kalz a dud a gousk war zeliou.

Anavezout a ra kalz a dud 'zo Yann o anv.

Gouzout a oar pelec'h ez eus biroù.

G. « Deomp war an hent merket gant ar bir », eme Garmen, pajenn 20.
« Pelec'h 'peus-te gwelet ur bir ? », a c'houlenn Maoutig.

Ha kavet 'c'h eus-te ar bir diskoachet gant Karmen ? Petra eo ?

H. Tres ur puñs.

YANN O KOUSKET HA YANN O LENN

Christian Jolibois ha Christian Heinrich

V. Yezhadur : ar verboù

V. A. Liamm ar furmoù verbal a gaver er frazennoù-mañ ouzh o rener :

	<input type="radio"/>	me
« Fablennoù a ouzon. »	<input type="radio"/>	te
« Yannigoù a anavezomp ! »	<input type="radio"/>	eñ / hi
« Ne chomont ket da yarañ ! »	<input type="radio"/>	ni
« Istorioù a gontez. »	<input type="radio"/>	c'hwi
	<input type="radio"/>	i

V. B. Ha gallout a ri argenañ ar verb « kontañ » amañ dindan e pep gour ?

Istorioù **a gont**..... (-me).

Istorioù **a gontez** (-te).

Istorioù **a gont**..... (-eñ).

Istorioù **a gont**..... (-ni).

Istorioù **a gont**..... (-c'hwi).

Istorioù **a gont**..... (-i).

LANKAD 5

(pajennoù 22-27)

*

I. A. GERIAOUEG :

kanfard : den yaouank pe, a-wechoù, farser bihan.

stagañ : kregiñ.

nouspet gwech : n'ouzon pet gwech.

gedal : gortoz (*Gedit ! = Gortozit !*).

kuit da... : evit chom hep....

N'omp ket domino ! : N'omp ket prest da zont er-maez eus hon zrubuilhoù ; N'eo ket
gounezet !

klaoustre : Me bari.

fallgaloniñ : koll kalon.

boud : ne gavont ket pezh a glaskont ; c'hwitañ.

kravazh : benveg, gant div pe peder brec'h, da zougen traoù pe tud.

ode : un toull, un tremen.

askell-kroc'hen : logodenn-dall

YANN O KOUSKET HA YANN O LENN

Christian Jolibois ha Christian Heinrich

I. B. GERIAOUEG :

Skriv an 12 ger displeget a-us en 11 frazenn amañ dindan :

1. *Batman* zo un den
2. Gadal eo an amzer. Me laka e vo brav warc'hoazh.
3. Dale zo gant ma mignon. Emaon o anezhañ.
4. Ur gwallzarvoud en deus bet ar paotr. Kit da gerc'hat urd'e gas
d'an ospital.
5. Evit mont d'an tu all eus ar menez ez eus bet toullet un
6. Pa na gomprenan ket ur boelladenn eo arabat din
7. N'out ket ma n'ouzout ket c'hoazh skoulmañ da lasoù da 20 vloaz !
8. Ur strollad a oa o c'hoari patati.
9. wech 'm eus klasket c'hoari echedoù,
met e choman bepred !
10. Debret en deus an holl wastell chokoladrannañ gant ar re all.
11. Kalz a labour hoc'h eus d'ober : poent eo deoc'h ganti !

YANN O KOUSKET HA YANN O LENN

Christian Jolibois ha Christian Heinrich

II. LENN :

A. Distag ar gerioù-mañ :

«HaKarmelitohadisplegañdezhañperakintdeuetbetekennañ.»

B. Klask war ar bajenn 23 gerioù kenster gant « Arabat deoc'h bezañ chalet ! ».

III. GOULENNOÙ KOMPREN :

A. Peseurt loen eo Yannig Reder (respont):

Ul lapin

Un azen

Ur c'had

B. Perak e ra Yannig Reder ur skoulm en e skouarn ?

Peogwir eo re hir.

Evit he stagañ mat.

Evit derc'hel soñj eus un dra.

C. Laka un niverenn er c'harrezioù diouzh an urzh m'eo aet hon fevar c'hanfard da glask an tudennoù-mañ :

Yann an Arzh

Yann Reder

Yann C'hazard

Yann ar Bleiz

Yann al Lins

D. Perak en deus Yann Reder kalz a skoulmoù en e zivskouarn war ar bajenn 24 ?

YANN O KOUSKET HA YANN O LENN

Christian Jolibois ha Christian Heinrich

E. Perak eo anat n'eo ket Yannig Reder emañ ar pevar c'hanfard o klask ?

F. War betra emañ Yann an Arzh o kousket ?

G. Tres dominoennoù.

YANN O KOUSKET HA YANN O LENN

Christian Jolibois ha Christian Heinrich

IV. Yezhadur : ar verboù

IV. A. Liamm ar furmoù verbel a gaver er frazennoù-mañ ouzh o rener :

D'ar red ez a va spered ivez ! ☹	☹	me
« N'omp ket domino. » ☹	☹	te
« Na piv oc'h ? » ☹	☹	eñ / hi
« Deskiñ buan a ran ! » ☹	☹	ni
« Dihun 'ta ! » ☹	☹	c'hwi
N'eo ket ar Yannig-se emaint o klask. ☹	☹	i

IV. B. Ha gallout a ri argenañ ar verb « bezañ » amañ dindan e pep gour :

N' **(-me)** ket domino !

N' **(-te)** ket domino !

N' **(-eñ)** ket domino !

N'**omp (-ni)** ket domino !

N' **(-c'hwi)** ket domino !

N' **(-i)** ket domino !

LANKAD 6

(pajennoù 28-33)

*

I. A. GERIAOUEG :

diskiant : sot, foll.

anez... : pe a-hend-all..., pe diwall...

e-giz : evel.

balbouzat : komz hep distagañ mat, en un doare displann ha re vuan.

bazailhat : digeriñ e c'henoù oc'h analañ hir.

hailhon : pezh drouk.

didorr : aes.

furig : fured

klevout : pakañ ur c'hwezh (gant e fri).

pole : rod da dreiñ chadenn ur puñs da ziskenn ha da bignat ur sailh.

I.B. GERIAOUEG :

Dibab 5 eus ar gerioù displeget a-us da leuniañ ar 5 frazenn amañ dindan :

1. Stagañ a ran da pa 'm bez c'hoant kousket.
2. Goap o deus graet ur vandenn dezhañ.
3. Emañ o peogwir en deus mezh.
4. C'hwezh vat aomp pa gegin an amezeion.
5. Te zo ! Mont da neuñval e-lec'h 'peus koll-sont !

YANN O KOUSKET HA YANN O LENN

Christian Jolibois ha Christian Heinrich

II. LENN :

A. Distag ar gerioù-mañ :

«Penaoskaoutundoaredazougenarc'hozhiadaesoc'h?»

.....

.....

B. Klask war ar bajenn 30 gerioù kenster gant « revr ».

.....

III. GOULENNOÙ KOMPREN :

A. Perak e kav da Garmen eo marteze an arzh ar Yann klasket ganto (pajenn 28) ?

.....

B. Perak ez eus tri fik arsav (...) bep tro ma lavar an arzh ar ger « anez... » ? (respont)

Peogwir ez eus aon da gaout rak pezh a raio.

Peogwir en deus ankouaet pezh a felle dezhañ lavarout war-lerc'h.

Peogwir eo ret klokaat ar frazenn gant ar respont mat.

C. Perak ne gouske ket mat an arzh ?

.....

D. Pegeit amzer e lavar e kousk an arzh ?

.....

YANN O KOUSKET HA YANN O LENN

Christian Jolibois ha Christian Heinrich

E. Petra o deus graet ar pevar mignon gant pole ar puñs (p.33) ?

Ur gibell.

Ur gaerell.

Ur garrigell.

F. Pajenn 28, e lavar an arzh eo “ an eil gwech din bezañ dihunet. ” Pegoulz e oa ar wech kentañ ?

.....

.....

G. Ha kousket mat a ray an arzh bremañ ? Perak ?

.....

.....

H. Tres ur garrigell.

YANN O KOUSKET HA YANN O LENN

Christian Jolibois ha Christian Heinrich

IV. Yezhadur : ar verboù

IV. A. An DOARE-GOURC'HEMENN (a implijer da reiñ urzhioù pe alioù mat). Sell :

(Pajenn 28) Sell 'ta !

(Pajenn 29) Kae 'ta !

(Pajenn 29) Lavar dezhañ 'ta !

(Pajenn 30) Chom sioul !

(Pajenn 30) Sell !

(Pajenn 32) Roulomp ha roulomp atav !

IV.B. N'eus nemet tri gour en doare-gourc'hemenn : te, ni, c'hwi.

Liamm ar furmoù verbal ouzh ar gourioù kinniget amañ :

Redomp buanoc'h !



te

Deus da welout !



Selaouit !



ni

Kanomp « ar voualc'h » !



c'hwi

Dihun 'ta !



Gedit c'hoazh !



IV.C. Dit-te bremañ da argenañ ar verboù diouzh ar gour roet etre krommelloù ().

C'hoari..... (-ni) *Un, daou, tri, Heol !*

Deu(-c'hwi) ganimp !

Digor.....(-te) an nor !

Ro(-c'hwi) boued d'ar yer !

Serr..... (-c'hwi) ar prenestr !

Dañs..... (-ni) an dro !

Komz (-ni) izeloc'h !

Echu(-te) da soubenn !

LANKAD 7

(pajennoù 34-39)

*

I. A. GERIAOUEG :

semplañ : koll e anaoudegezh.

flaer : c’hwezh fall, c’hwezh put.

firbouchal : klask.

disterniañ : diskuizhañ.

kur : kibelladenn er vouilhenn.

serr-noz : mare ma kuzh an Heol ha ma tua an oabl.

gwallreuz : tra divat, darvoud maleürus, spont.

hendad : *tad kozh-kozh, tad-kozh ma zad-kozh...*

stalaf : planken koad pe mezell pe houarn a servij da serriñ ur prenestr.

arouez : un dresadenn, pe ur merk, da ziskouez, da reiñ ur mennozh.

I.B. GERIAOUEG :

Dibab 5 eus ar gerioù displeget a-us da leuniañ ar 5 frazenn amañ dindan :

1. Pa sav an Heol e plij din digeriñ prenestr ma c’hambr gant kalz a drouz.
2. Ar c’hi zo un eus ar fideded.
3. Breizhad on met ma a oa Vikinged.
4. Gant ar spont dirak ar reizhskrivadenn eo holl skolidi ar c’hlas.
5. Piv zo bet o e-barzh ma zroñsenn ! Ne gavan mui ma c’hreion !

YANN O KOUSKET HA YANN O LENN

Christian Jolibois ha Christian Heinrich

II. LENN :

A. Distag ar gerioù-mañ :

« EmaonoklaskurYannbennakgouestdagontañmarvailhoùemlec’h. »

.....

.....

B. Klask war ar bajenn 38 ur ger kenster gant « **buan-tre** », « **a-benn nebeut** ».

.....

III. GOULENNOÙ KOMPREN :

A. Perak e ra an aozer « loenig e c’hwezh vat » eus ar furig, pajenn 34 ?

.....

B. Peseurt traoù all he deus ar c’hoz vihan d’ober ? (pajenn 37)

.....

C. Perak e lavar Karmelito « ne dalv ket ar boan goulenn tra ebet » digant an tri marmouz ? (p.37)

Peogwir int diskiant.

Peogwir ne fell ket dezho klevout, na gwelout, na lavarout mann ebet.

Peogwir int glas, gwenn ha ruz.

Peogwir int flaerius.

D. « Erru ar serr-noz, en trede devezh » (p. 38). Petra a dalvez evit ar Razh Koñchenner ?

.....

.....

YANN O KOUSKET HA YANN O LENN

Christian Jolibois ha Christian Heinrich

E. Klask petra eo anv an holl loened kavet gant ar pevar mignon (pajennoù 36, 37, 38) ?

.....
.....
.....

F. Peseut hêrezh dibar zo bet legadet d'ar Razh Koñchenner gant e hendadoù (p.38) ?

Un horolaj.

Kontadennoù.

Ne ouzomp ket.

G. Pajenn 37 : Perak eo lous Maoutig ?

.....

.....

H. Ha soñj 'c'h eus eus pezh a ziskouez ar bir, hervez divinadell Ezop (p. 17) ?

.....

.....

I. Tres ur penn-kazh.

YANN O KOUSKET HA YANN O LENN

Christian Jolibois ha Christian Heinrich

IV. Kanañ

Sed amañ dindan ur ganaouenn c'hallek. Ha kompren a ri peseurt liamm he deus gant hon istor ? Peseurt pajenn emañ an alc'houez ? Ha petra eo an alc'houez ?

Le furet du Bois-Joli

1.

Il court, il court, le furet
Le furet du bois, mesdames,
Il court, il court, le furet
Le furet du Bois-Joli.

Il est passé par ici
Le furet du bois, mesdames
Il est passé par ici
Le furet du Bois-Joli.

2.

Il court, il court, le furet
Le furet du bois, mesdames,
Il court, il court, le furet
Le furet du Bois-Joli.

Il repassera par là
Le furet du bois, mesdames
Devinez s'il est ici
Le furet du Bois-Joli.

3.

Il court, il court, le furet
Le furet du bois, mesdames,
Il court, il court, le furet
Le furet du bois joli.

Le furet est bien caché
Le furet du bois, mesdames,
Pourras-tu le retrouver ?
Le furet du bois joli.

YANN O KOUSKET HA YANN O LENN

Christian Jolibois ha Christian Heinrich

V. Yezhadur : ar verboù.

VI. A : Argen ar verb BEZAÑ en amzer-vremañ :

1. D'ober petra (-me) deuet amañ ?
2. D'ober petra (-te) deuet amañ ?
3. D'ober petra (-hi) deuet amañ ?
4. D'ober petra (-eñ) deuet amañ ?
5. D'ober petra (-ni) deuet amañ ?
6. D'ober petra oc'h (-c'hwi) deuet amañ ?
7. D'ober petra (-i) deuet amañ ?

V. B : Argen ar verb BEZAÑ en amzer-vremañ er furm leel :

1. Emaon **(-me)** o klask ur Yann bennak.
2. Ema **(-te)** o klask ur Yann bennak.
3. Ema **(-hi)** o klask ur Yann bennak.
4. Ema **(-eñ)** o klask ur Yann bennak.
5. Ema **(-ni)** o klask ur Yann bennak.
6. Ema **(-c'hwi)** o klask ur Yann bennak.
7. Ema **(-i)** o klask ur Yann bennak.

V. C : Argen bremañ ar verb KAOUT en amzer-vremañ :

1. Traoù all **'m eus** (-me) d'ober !!!
2. Traoù all (-te) d'ober !!!
3. Traoù all (-hi) d'ober !!!
4. Traoù all (-eñ) d'ober !!!
5. Traoù all (-ni) d'ober !!!
6. Traoù all (-c'hwi) d'ober !!!
7. Traoù all (-i) d'ober !!!

LANKAD 8

(pajennoù 40-48)

*

I. A. GERIAOUEG :

chou : a vez lavaret d'ar yer pe da loened all d'ober dezho mont pelloc'h.

gweladenn : den a zeu da weladenniñ, da welout.

talmiñ : poulzañ, lammat, skeiñ.

karout : kaout karantez.

asantiñ : mont a-du.

paz : teurel aer er-maez eus ar skevent gant un trouz, dre gleñved pe evit skarzhañ e
c'houzoug.

stagañ ganti : kregiñ.

kuit d'... : hep, evit na..., evit chom hep...

tarzh an deiz : gouloù deiz ar beure.

diverañ : redek d'an traoñ takenn ha takenn evel un dourenn.

I.B. GERIAOUEG :

Dibab 5 eus ar gerioù displeget a-us da leuniañ ar 5 frazenn amañ dindan :

1. « 'ta, kae diwar va zro, loen fall ! »
2. a reas priñsezig an dour pokat d'an touseg.
3. Bep beure e sav al labourerien-douar a-raok
4. Echuomp al labour hiziv, dimp da zont amañ adarre warc'hoazh.
5. Ar a droc'he hec'h anal e-pad ar c'hentelioù ken na oa ket evit ober mat labour.

YANN O KOUSKET HA YANN O LENN

Christian Jolibois ha Christian Heinrich

II. LENN :

A. Distag ar gerioù-mañ :

Evitlakaatvac'hamaladeddac'hoarzhinbikenkenevelunarzhneharzhin.

.....

.....

B. Klask war ar bajenn 41 un dro-lavar kenster gant « **buan-tre** ».

.....

III. GOULENNOÙ KOMPREN :

A. Petra eo anv ar bugel yaouank ?

.....

B. Petra edo ar bugel o skrivañ a-raok na deufe ar pevar mignon en e di ?

.....

C. Hag asantiñ a ra Yann ar bugel da zeskiñ ar c'hoñchennoù dindan eñvor ?

.....

D. Peseurt mennozh en deus bet Yann ar bugel evit derc'hel gwelloc'h soñj eus ar c'hoñchennoù ?

Skrivañ anezho war delioù.

Dastum anezho gant e deñzorioù.

Skrivañ anezho war baper.

Skrabañ e berukenn.

E. Pajenn 46 emañ bodet kalzik Yannoù bet kavet gant hon 4 mignon a-hed al levr.

Ha gouest out da adkavout war beseurt pajenn edo pep hini ?

YANN O KOUSKET HA YANN O LENN

Christian Jolibois ha Christian Heinrich

F. Klask er skrid an trouz a ra...

unan o pasaat :

ur bluenn o skrivañ war ar paper :

unan o skeiñ war an nor :

G. Petra eo, da 'z soñj, anv ar paotrig ?

Yann Stivell.

Yann ar Feunteun.

Alan Stivell.

H. Petra a lavar Yann emañ o vont d'ober er c'hlud ?

Lenn un istor

Kontañ un istor

I. Hag ar memes arz eo ha hini ar razh Koñchenner ? Perak ? Petra zo kemmet ?

.....

.....

J. Tres koñchenn ar vran hag al louarn.

YANN O KOUSKET HA YANN O LENN

Christian Jolibois ha Christian Heinrich

IV. Yezhadur : ar verboù

IV. A : Furm leel (> lec'h) ar verb BEZAÑ en amzer-vremañ :

1. Emaon (-me) o vont da lenn deoc'h !!!
2. Ema..... (-te) o vont da lenn dimp !!!
3. Ema..... (-eñ) o vont da lenn deoc'h !!!
4. Ema..... (-hi) o vont da lenn deoc'h !!!
5. Ema..... (-ni) o vont da lenn deoc'h !!!
6. Ema..... (-c'hwi) o vont da lenn dimp !!!
7. Ema..... (-i) o vont da lenn deoc'h !!!

IV. B : Furm leel (> lec'h) ar verb BEZAÑ en amzer-vremañ.

Liamm ar furmoù ouzh ar gourioù :

Emaon	☉	☉	eñ
Emañ	☉	☉	hi
Emaint	☉	☉	me
Emaout	☉	☉	ni
Emaomp	☉	☉	te
Emaoc'h	☉	☉	c'hwi